



Tamm ha tamm 'vez graet e vragoù da Yann
Tamm ha tamm 'teu kof d'ar vamm
skolpenn ha skolpenn 'vez stummet an delwenn
Dorn ha dorn 'vez frailhet ar skorn
Delienn ha delienn 'teu blev d'ar wezenn
Kest ha kest 'teu reut ar voest
Bleuñv ha bleuñv 'vez fichet ar c'hleuz
Lagad ha lagad 'tiskoacher ar c'had
Taolenn ha taolenn 'tifluk an awen
Gwalenn ha gwalenn 'tistrujer ar chadenn
Ger ha ger 'vez kavet ar ster
Houlenn ha houlenn 'teu kein d'ar wagenn

Tamm ha tamm, ya, tamm ha tamm
Met tamm ha tamm n'eo ket bras a-walc'h al lamm

'Baoe m'eo savet an heol e redan
War hentoù distradet, plaen, strizh ha ledan
O teurel pled deus kement den a welan
O terc'hel soñj deus kement kan a glevan
'Baoe m'eo tarzhet an deiz e redan
War-lerc'h petra, piv ? N'em c'houlenn a ran !

*Hir, hir, hir, hir, hir an hent
Hir, hir, hir, hir, hir an neudenn Her,
her, her, her, her an hent
Pe'r, pe'r, pe'r, pe'r 'vo e penn ?*

'Baoe ar c'hokerikero kentañ e redan
Bountet, douget, heñchet ga'n avel, ar glizh, ar balan
Ailhenn, glav pil polos, ar grizilh a faoutan
Tan an heol, dev ar boan a zouran
'Baoe m'eo ganet ar bed e redan
War-lerc'h petra, piv ? N'em c'houlenn a ran !

*Hir, hir, hir, hir, hir an hent
Hir, hir, hir, hir, hir an neudenn
Her, her, her, her, her an hent
Pe'r, pe'r, pe'r, pe'r 'vo e penn ?*

'Baoe m'eo difoupet ar vuhez e redan
Met aze, hiou, bremañ, diouzhtu e skuizhan
O stouiñ ma fenn 'rak kement urzh a lonkan
O plegiñ ma choug di'an kement taol a dapan
'Baoe m'eo lusket ma c'halon e c'houlan
An aotre da sevel, da brechiñ, da vezañ
Met hiou eo an nevez-hañv, ga'r goukoug e kanan
Da gavout ma hent ha redek pa garan !

Nolwenn Korbell (miz Ebrel 2008)